

27

95

# GWERZ

## AN OTRO SANT LOUP

ARC'HESKOP SENS

Marvet er bla 1623

En hano an Dreindet Santel,  
Tad ha Mab ha Spered Santel,  
Bretonet, gand devoision,  
Klevet mouez sant Loup, hon Patron.

Ganet dam-dost da Orléans,  
A wad rouane koz ar Frans,  
E dad Betton, Agi, e vam,  
A oa tud pinvidig estlam.

Welloc'h c'hoaz, kristenien touet,  
'Vit gloar Doue leun a aket;  
O finvidigez hag o aour  
Ac'h è holl da zikour ar paour.

Epad ma touge he bugel,  
D'ar brinsez tisklerias eun ael :  
« Ho mab, Agi, 'vid an Iliz  
Vo eun de sklerijen iskiz. »

Setu 'vit-i c'hoaz digare,  
Digare mad deus a zonje :  
Daoust da c'hiz ha prezegerez,  
Na c'houlas ket a vagerez.

Da skoliata oe lakeet  
Etre daouarn daou den brudet,  
Daou eskob, breudeur d'ar brinsez,  
Leun a skiant hag a furnez.

Heveleb diskib ha mistri,  
Ac'h eas buhan gand ar studi ;  
Met bepret Sant Loup huanade :  
« Ar pezh a fell d'in eo Doue ».

Ar bobl a glask, rag ben a gar,  
E vouez tom, e gomz helavar...  
Hag e plij dean lec'h distro  
Ha, welloc'h, treid an aoterio.

Pac'h è lakeet da gloareg,  
Ouz ar bed na c'houl mui abeg :  
Gwerza ra e vado a-blen,  
Hag o friz a ro d'ar baourien.

Goude 'c'h a hon sant evuruz,  
Da vanac'hti Lerins da guz  
Da guz, d'en em rei d'ar beden,  
Da iun ha d'ober pinijen.

Daoust ha kuz e felle dea,  
Ret oa d'e vertuio para :  
Gand ar c'houlmoul ve tevalet,  
Met mouget an heol na ve ket.

Arc'heskop Sens, deut da vervel,  
Piou ve war e lerc'h da henvel ?

Ar santela zo, 'me ar bobl  
Kemerom sant Loup da eskob.

Na gwella dibab oe hennez !  
Na pegen mad d'ar gristeniez !  
Ar fe gavas welloc'h aze  
Hag ar vad en em zantas kré.

Peb sempladurez a gav skoa,  
Ha peb paour 'n eus eun tam bara ;  
Pinvig a lez e lorc'hente,  
Etre 'n holl kresk ar garante.

Eur beleg, goude eur gwall-lamm,  
Na belle mui finval eun tamm;  
Da zant Loup ec'h eo 'n em westlet  
Ha raktal 'n em gav en iec'het.

Herry Pevar reas eun naonet  
'Vit e Daophin, Louiz Trizeg :  
Louis 'vit e vab reas eun all.  
Sant Loup oa sant rouane Gall.

En Paris hag en Orléans,  
E liez ker all euz a Frans,  
D'hon Sant oe savet ilizo,  
Dre ma ree kalz a viraklo.

Burzudo bepret a zo bet  
E-touez ar re 'n eus hen pedet ;  
Pedet ama a wir galon,  
Hag 'welfet galloud hon Patron.

Bet a zo ama meur a gant,  
Gwallet gand klenvet an droug-Sant :  
Goude peden vad, hepdale,  
D'ar ger e tristroent pare.

Gwelet a zo bugaligo  
Gand ar went goueet o c'horfo,  
War o fen en Sant-Loup eur stol  
O lakae iac'h en eun tol.

Liesoc'h 'vit burzudo braz,  
Hon Patron a dalve d'im gras  
'Vit distrei eus an hent zo treuz,  
Goude pec'het da gaout keuz.

Otro Sant Loup, ni holl ho ped,  
O Patron mad, hon zikouret.  
Ma vefom kristenien welloc'h,  
Ma karfom Doue evel-d-oc'h.

Hon diwallet korf hag ine,  
Miret 'r re goz, ar vugale,  
Ni deoc'h a vo fidel dalc'h-mad,  
Ha c'houi vo 'vidom eur gwir dad.

DISKAN :

Otro Sant Loup, ni holl o ped,  
O Patron mad, hon zikouret ;  
Ni deoc'h a vo fidel dalc'h-mad,  
Bezet evidom eur gwir dad.

B. A.

S. Loup. 1<sup>a</sup> a viz Gwengolo 1897.

